

Gorreoù : Degas 'reomp da soñj ag ho marv,
Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion, Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue, ... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Oan Doue :

**Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !**

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aeset din.**

Komunion :

Diskan : Karit ho preuder, hag e vin geneoc'h.

- 1 Me eo 'r bara daet ag en neñv. (2w) 4 Ma chom ma c'homzoù bev ennoc'h. (2w)
Neb a gred ennon 'deus ar vuhez. Goulennit get feiz, roet e vo deoc'h.
- 2 C'hwi holl a zo skuizh ha sammet. (2w) 5 'Vel m'en deus an Tad Ma c'haret, (2w)
Dait ha Me 'roay doc'h nerzh ha kalon. 'Vel-se ivez am eus ho karet.
- 3 Dait, c'hwi a glask ar wirionez, (2w) 6 Me eo 'r vuhez, ar wirionez, (2w)
Ma c'homzoù 'zo spered ha buhez. An Hent ho kaso betek an Tad..

'Cit kloziñ an oberenn

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn :

Rouanez an neañv, kemerit joe,
Allelouia ! Allelouia !
Rak ar frouezh ag ho tigostez
Allelouia ! Allelouia !

Deoc'h, Gwerc'hez, joe ha levezenez,
Allelouia ! Allelouia !
Jezuz 'zo savet ag ar bez,
Allelouia ! Allelouia !

A zo savet bev ag ar bez,
Allelouia ! Allelouia !
Pedit 'eidomp an Aotrou Doue,
Allelouia ! Allelouia !

Parrez Ker Anna

5^{vet} Sul Fask

3 a viz Mae 2026

« Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuhez »

Kan digor :

Spered Santel, dait, ni ho ped, E kalonoù ho fideled, Ha dalc'hit bev enne bemdez An tan-flamm ag ho karantez.	Degasit, man Doue, ho Spered, Hag, en holl vroioù ag ar bed, Getañ pep tra en do buhez, Pep tra a vo graet a-nevez.
Dre ho Spered, an disipled 'Zo daet un deiz da vout parfet ; Drezañ deomp-ni roit gouiegezh Hag e pep tra koñfort ha peoc'h.	

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*
Respont : Ha get ho spered !

Asperges: Allelouia !

- | | |
|--|---|
| 1 Ha gwelet am eus an dour bev
É strinkiñ a kalon ar C'hrist !
An holl re 'vo gwalc'het en dour-se
A vo salvet hag a gano : | 3 Gwelet am eus ivez an Templ
Digor da virviken d'an holl
Ar C'hrist a zeu en-dro get trec'h,
A ziskouez gouli e gostez. |
| 2 Ha gwelet am eus ar vammenn
É tont a vout ur stêr divent !
Ha bugale Doue, holl tolpet
'Gane laouen a vout salvet : | 4 Gwelet am eus ivez ar Gomz
É reiñ deomp peoc'h hon Aotrou Doue.
An holl re a gred en e anv
A vo salvet, hag e kanint : |

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.
Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr oberoù an Apostoled.

En deizioù-se, 'vel ma kreskae niver an disipled, en em lakaas ar C'hresianegerion da vrogonat a-enep d'an Hebreegerion abalamour ma veze, hervez o soñj, lezet o intañvezed re a-kostez er servij pemdeziek. An daouzek a c'halvas neuze an disipled d'en em dolpiñ holl hag a lâras dezhe : «N'eo ket mat e tilezahemp komz Doue evit servij doc'h taol. Klaskit kentoc'h en ho mesk seizh gwaz a vrud mat, leun a Spered Santel hag a furnezh, ha ni a fizio ar garg-se enne. Ni avat a zalc'ho gredus da servij ar Bedenn ha ministrerezh ar Gomz.» Plijet en doa ar c'homzoù-se d'an holl dud bodet hag e voe dibabet gete Stevan, den leun a feiz hag a Spered Santel, Filip, Prokor, Nikador, Timon, Parmenaz ha Nikolaz, ur prozelit a Antiokia. O degas a rezont dirak an apostoled, hag ar re-mañ, goude bout pedet, a astennas o daouarn àrne. Komz Doue a yae àr gresk, hag e teue da vout stankoc'h-stank niver an disipled e Jeruzalem. Ar veleion ivez, un niver bras anezhe, a zouje d'ar feiz.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 32 : Aotrou, ra vo ho trugarez àrnomp,
evel m'emañ ennoc'h hor fiziañs.

Youc'hit d'an Aotrou, c'hwi an dud reizh;
evit ar re just eo un dever er meuliñ.

Rentit bennozh d'an Aotrou àr ar gitar,
salmit dezhañ àr an delenn dek kordenn.

Gwirion eo komz an Aotrou,
e fealded en em ziskouez en e holl oberoù.

Kariñ a ra ar justis hag ar reizhder;
leun eo an douar get madelezh an Aotrou.

Met àr e dud fidel e par daoulagad an Aotrou,
àr an dud a esper e garantez,
evit tenniñ o enefvoù ag ar marv
hag evit o beviñ e amzer ar gerteri.

Eil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher kentañ sant Pier.

Breuder, tostait doc'h Jezuz an Aotrou. Eñ eo ar maen bev, taolet a-kostez get an dud, met dibabet ha prizius dirak Doue. Ha c'hwi ivez, evel mein bev, bezit danvez an Templ speredel a zo é sevel; dait da vout ur velegiezh santel evit kinnig aberzhoù speredel plijus da Zoue dre Jezuz Krist. Rak kement-mañ a zo er Skritur : Setu ma lakaan e Sion ur maen-korn dibabet, prizius; hag an hini en em fizio ennañ n'en devo ket a geuz. Deoc'h-c'hwi enta, tud a feiz, an enor ! Met, evit ar re na gredont ket, ar maen bet lakaet a-kostez get saverion an ti, ha deuet da vout ar maen-korn, a zo ivez ur maen-skoilh, ur roc'h hag a laka da gouezhel. Monet a reont da skeiñ doc'hti dre ma ne sentont ket doc'h ar Gomz. Met c'hwi a zo an ouenn dibabet, ar gumuniezh santel a veleien, ar vroad santel, ar bobl bet prenet get Doue evit embann oberoù galloudus an hini en deus ho kalvet ag an deñvalijenn d'e sklerijenn vurzhudus.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Abiel : Allelouia

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Abiel santel hervez St Yehann.

R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !

D'an amzer ma oa Jezuz é tremen ag ar bed-mañ davet e Dad, e lâre d'e zisipled : «Na laoskit ket ho kalonoù da vout nehañset. Krediñ a rit e Doue, kredit ivez ennon-me. E ti ma Zad eh eus paot-mat a lec'hioù : pa ne vehe ket 'vel-se e vehe, m'em behe el lâret deoc'h, rak e yan da gempen ul lec'h deoc'h. A pa vin aet kuit hag a p'em bo kempennet ul lec'h deoc'h, me 'zay en-dro ha m'ho kemero genin, evit ma vehet, c'hwi ivez, el lec'h ma vin-me. Gouiet a rit e-men eh an, ha c'hwi a anav an hent.» Tomaz a lâre dezhañ : «Mestr, ne ouiomp ket e-men e yit; penaos e c'hellomp-ni gouiet an hent ?» Jezuz a lâre dezhañ : «Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuhez; hini nend a da ma Zad, nemet drezon-me. Pa 'm anavahec'h, c'hwi a anavahe ivez ma zad; met c'hwi en anavo edan berr, ha gwelet hoc'h eus-eñ dija.» Filip a lâre dezhañ : «Mestr, diskouait deomp ho Tad, hag a-walc'h e vo evidomp.» Jezuz a respont dezhañ : «A-c'houde ken pell amzer mah on geneoc'h, n'em anavit ket c'hoazh, Filip ? An nep am gwel a wel ivez ma Zad. Penaos e c'hellez-te lâret : Diskouait deomp ho Tad ? Ha ne gredit-c'hwi eh on en Tad hag emañ an Tad ennon ? Ar pezh a lâran deoc'h, n'el lâran ket a ma ferzh; met ma Zad a chom ennon a ra-eñ-memp ar burzhudoù a ran-me. Ne gredit-c'hwi eh on en Tad hag an Tad ennon ? Kredit ac'hoel abalamour da 'm oberoù. E gwirionez, e gwirionez, m'el lâre deoc'h, an hini a gred ennon a ray ivez an oberoù a ran-me, eñ a ray memp re brasoc'h; rak e han devat ma Zad..

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Benniget an hani a za e anv Doue : **Hosanna e lein an ne !**